

Landerne

Il y a une chapelle s^r y a une sainte do-
maine de Trémareg, à Landerne, presquiti
de la famille de **KANTIK** ^{ENN}, puis de Pampory

ENOR DA SANT IOUEN

Q'end an hini - la religion du saint des 4^{es} ans
y est consacrée.

TON : Potred Loguivy, pe Santes Anna.

Enn hon touez deuz a Sant Iouen
Braz eo ar madobero ;
O sonjal enn-he kristenien,
A guir galon ni laro :

8N2-2-081

DISKAN.

Otro Sant Iouen bennignet,
Enor ha sikour hon bro,
Ann neb ho ped en deuz bepret
Eun difenner enn evo.


Enn evo evel enn douar
Sant Iouen zo gant saduz,
Hag he galon d'ann neb hen kar,
Zo mad ha trugarezuz.

Ia, pep hini da Sant Iouen
N'euz nemed enn en voestla ;
E pep ezom hag e pep anken
E vo zikouret gant-ha.

Evit traou ann douar nec'het
Gand ar glao pe ar sec'hour,
Da Sant Iouen omp diredet,
Bepred hon euz bet sikour.

D'ar belek, d'ann den a lezen,
Avocat, belek santel,
Sant Iouen ro skouer, sklerijen,
Ma vint enn ho c'harg fidel.

Ar vam a lavar eur beden
Da Sant Iouen beb heure,
Kalon he mab vel eur rozen
A zigor varzu ann Ee.



Ann intañvez paour ha glac'haret,
Gant he famill-hep souten,
Ouz Sant Iouen enn em erbet,
Ha Sant Iouen he difen.

Ar bugelik kez emzivad,
Tad ha mam gant han kollet,
E Sant Iouen a gav eun tad,
Gant assistans vad bepred.

Ar zoudard galvet d'ann arme,
Ken kuitaat, da Zant Iouen
A ia da bedi, ha neuze
A deu da gana laouen :

Ar martolod var ar mor don,
Guall hejet he vag dister,
A zo fians enn he galon :
Sant Iouen eo he sturier.

Al labourer, devot d'ar Sant,
A gav skanvoc'h ann arar,
Calz blotoc'h ve ar park pa blant,
Pa sko he bal en douar.

Ann devezour, ann den a boan,
Bemde kent mort d'he zevez,
Ma z'eo devot d'ar zant-man
A gano gant levénez :

Ni a zo oll devezourien,
Er bed-man, ha tud a boan ;
Ha c'houi disprizfe hor peden,
C'houi ker mad 'vit peb unan.

Kalz ac'hanomp, hep pell dale
Dle achui ho devez ;
Grit d'imp mont da gana enn Ee
Goude kana er vuez :

Imprimatur :

Brioci, 22 Septembris 1864.

OLLIVIER, Vic. gén.

Quimper, typ. de Kerangal.